



2017

## PROGRAMM AR RUMMAD KANAÑ E-BARZH AN DAÑS

Ar rummad « Kanañ e-barzh an dañs » a bleustro war tonioù da zañsal hag a vo dibabet pe diouzh ur mod « kan ha diskan » (Gavotenoù ar menez, Plinn, Pach-Pi, Scottish, ...) pe diouzh ur mod da respont (diwar ar glad eus Bro Leon pe tro-dro : dañsoù Round, Piler lann, Gavotenn Leon, ...). Kanañ ha dañsal war un dro a vo pal an abadennoù kaset gant ar rummad-se : gant an holl dañsoù eta e vo kanet a-stroll en ur zañsal asambles e-barzh ar ront. Ma chom amzer ha ma vez c'hoant gant an dud e vo gellet ivez deskiñ ha kanañ traoù all ouzhpenn : tonioù bale, kan a boz, ...

Evit an tonioù hag an dañsoù-se, hag a vo choazet e penn kentañ ar staj asambles gant ar stajidi diwar kinnigoù graet gant ar stummerien, e vo kaset ul labour :

- war an dañsoù o-unan (hag a vo desket dañsal anezho evit ar re na oufent ket)
- war ar c'hanaouennoù (dont barrek da respont hep lenn, ar c'hanañ a-stroll, an dialaniñ, an nerzh a-stroll kaset en dañs, ...)
- war ar brezhoneg : unan eus an troioù efedusañ evit bezañ intret gant ur brezhoneg naturel eo kanañ :
  - ✓ a-drugarez d'al labour eñvor diouzh ar seurt "hep gouzout d'an den" a vez kaset er mod-se,
  - ✓ gant ur bern troioù degaset gant pozioù ar c'hanaouennoù ha implijet « dre refleks » goude-se,
  - ✓ hag a-drugarez d'ar pleustriñ war ar muzik heverk a zo stag d'ar yezh hec'h unan (prozodiez ar brezhoneg) hag a vo kaset dre labourat war ar c'hleved ha war ar modoù disklipañ disheñvel diouzh terouerioù an tonioù.

Pep tra a vo e brezhoneg. Evit kemer perzh n'eus ket ezhomm gouzout kanañ na dañsal **nemet em santout en e jeu un tamm mat e brezhoneg** ha degas startijenn kenkoulz ha c'hoant da labourat a-stroll.

-----  
**EVEZHIADENN** : Pleustret e vo war an danvez-se bemdez eus 9 eur betek kreisteiz hag eus 2 eur betek 5 eur goude kreisteiz, a-hed ar sizhun.

Ar stajidi o devo dibabet mont gant ur rummad diouzh temoù ne c'hellint ket kemer perzh er c'hentelioù brezhoneg kinniget diouzh live an dud.